



K
R
O
A

BREIZ

DU 1948 ⑦ PRIZ : 25 LUR

TAOLENN AN NIVERENN-MAN

An Anaon (Y-F. ar Falc'hun)	Pajenn	1
Goueliou ar Miz (An Tad)	—	3
Psalmou ar Binijenn (Ao. Guivarc'h)	—	4
An Aotrou 'n Eskob Duparc (P-Y. Nedeleg)	—	5
Savomp hon daoulagad drezek ar stered (J. Seité)	—	6
Va c'hoelig gwen (Kanacuenn)	—	7
Pajenn an Emzao Katolik : ar zul (L. Bleunven)	—	8
Ar vretoned er-maez eus Breiz (Arzel Gervorvan)	—	9
Petra eo ar Bleun-Brug (Visant Favel)	—	10
Eun dro lous : Kontadeun (L. B.)	—	12
Ar brezoneg er skol (Y. F. ar F.)	—	14
Lennit	—	15
C'hoariou	—	16

Korn ar Merour : L. Bleunven.

Traon-Dour-Tenn (Y. Kerloar).

War golo an niverenn-man : Pedenn e bro dreger (skeudenn Gilles Boinef).

PRIZIOU :

An niverenn-man	25	lur	} Gwelit korn ar merour, e trede pajenn ar golo.
Koumanant ordinal	200	lur	
Koumanant a zikour	300	lur	
Koumanant a enor	500	lur	

Kas an arc'hant da : **M^r l'Abbé Laurent BLEUNVEN**
Recteur de **Plomelin**, par Quimper (Finistère)

Skrivit sklaer hoc'h anioù, mar plij

Koumanantit! Klaskit deomp koumananterien!

LAKIT EVEZ BRAS

1. Evit kement a zell ouz danvez-skrid ar gelaouenn : skriva da rener Kroaz Breiz : **Mr l'abbé Jean-François Falc'hun**, professeur au **Grand Séminaire de Quimper (Finistère)**.

2. Evit kement a zell ouz koumanantou ha profou, skriva da : **Mr l'abbé Laurent Bleunven**, recteur, **Plomelin**, par **Quimper**, (Finistère). **C. C. P. 1266.53 Rennes**, ha nann mui 21.802 evel araok.

AU MEUBLIER D'ART Ty-Breiz

René CREACH'CADIC

21, Avenue de la Gare, QUIMPER

Téléphone 4-83

Son Musée d'Art Breton

Ses Intérieurs Anciens

Installations de Magasins

Aménagements de Cafés

et de Bars Américains

FILET BLEU

Eur jazi bennak a zo bet graet gant ar mouler er pennadou bet embannet war « ar Brezel e Breiz-Izel » gant Mari Seité. Setu amañ an divankadennoù brasa ha n'hellont ket beza graet gant al lenner. En talbenn, en holl niverennoù, e-lec'h : « ar 6 a viz east », lennit : an 8 a viz east.

En niverenn 2 pajenn 14.

E-lec'h : « dar anezé », lennit : « darn anezé ».

En niverenn 3 pajenn 13.

E-lec'h : « eur c'halkuad o peurzezi », lennit : « o peurzezi ».

E-lec'h : « hag eo an tan breman », lennit : « hag emañ an tan breman... ».

P. 14, e-lec'h : « ne somjomp ket da varc'hata... », lennit : « ne chomjomp ket da varc'hata... ».

E-lec'h : « a-dreuz-didrouz », lennit : « a-dreuz-didreuz... ».

E-lec'h : « em boa evel son o tostaat outi... », lennit : « em boa evel aon... ».

E-lec'h : « If kombo », lennit : « If kombol... ».

E-lec'h : « lakaet e vos », lennit : « lakaet e voe... ».

Niverenn 4 p. 9.

E-lec'h : « ar voged a zoue betek ennomp... », lennit : « ar voged a zeue... ».

E-lec'h : « met etu eun trouz bennak... », lennit : « met setu eun trouz bennak... ».

E-lec'h : « o vannou... », « o vennas... », lennit : « e vannou... », « e vennas... ».

E-lec'h : « tud all, deuet eus a Lanneufeld a da laza... », lennit : « tud all deuet eus a Lanneufeld a oa o klask laza an tan... ».

E-lec'h : « Leslaou-Vihan », lennit : « Leslaou-Vihan... ».

E-lec'h : « o klask laza an tan en eur bern-koad... », lennit : « o klask laza an tan en eur bern-kuad (eur wrac'hell) ».

P. 11 : « ar gazeg varo a oa zouara... », lennit : « ar gazeg varo a oa da zouara... ».

E-lec'h : « a-benn ar 10 da nez... », lennit : « ... da noz... ».

E vez dreset adteuzet evit ar gwella goloioù-kaoutchoug ar rodou
Gwerz a c'holoioù a bep ment — labour val, graet hep dale

"AGA"

Véritable Cuisinière à feu continu

"UNIQUE AU MONDE"

MODÈLES POUR PENSIONNATS
COMMUNAUTÉS, FERMES, etc.

Concessionnaire :

LECERF, 8, Rue Kerfenteun, QUIMPER — Téléph. 8-88

ART SACRÉ

ORFÈVRE
BRONZES
STATUAIRE
CHASUBLERIE

Pierre PÊCHE

14, Boulevard de Kerguelen
QUIMPER (Finistère)

Téléphone 8-10

LUNETTERIE — ORTHOPÉDIE

Diplôme
de l'Ecole
Nationale
d'Optique

DELBENN

Diplôme
de l'Ecole
Française
d'Orthopédie

16, Rue Kéréon. — QUIMPER

LE BIHAN-SALUDEN

7, Rue Kergariou
QUIMPER

VITRAUX


PAPIERS D'EMBALLAGE EN TOUS GENRES

SACS ET NAPPES EN PAPIER, FICELLES

Jean PAYAN

Dépôt : 54, Quai de l'Odéon
QUIMPER Tél. 12-88

133628



Hon Anaon (*)



“ Maro int. Astennet er bez yen ha didrouz,
Du-hont e bered ar barrez;
Dindan o fenn peder blankenn, eun torchad plouz,
A-us, c'houec'h troatad douar, eur maen hag eur groez (1).
War ar groaz du, o ano, gwecharall (2) bet e gwenn,
Gant ar glao a zo dislivet;
Tro-ha-tro, eur geot druz a zav war an dachenn...
Ar re-ze tremenet, o! n'o ankounaomp ket!
Ne welont tra. Ne glevont tra. Noz eo gante (3).
Kaer en deus an eostig seni,
Kaer en deus an avel hag a dremen er gwe(z),
War ar barrou (4) hep deilh 'n em glemm hag hirvoudi,
Bouzar int, dall int, an noz 'zo warno; an noz,
An noz pounner, an deñvalded,
Daoulagad, diskouarn, beg (5), da viken 'zo kloz :
Ar re-ze tremenet, o! n'o ankounaomp ket!
Nann, n'o ankounaomp ket! Dalc'hit soñj kentoc'h, c'houi,
Penaos gwecharall ar penn-ze,
Pa oa eun tamm buhez en e lagad goulli, (6)
En deus taolet warnoc'h sellou a garantez;
Penaos ar beg paour-mañ 'n eus graet vad d'ho kalon,
Gant komzou dous, pa oac'h poaniet :
Nann, ma ho peus ene ha spered eur Breton,
Ar re-ze tremenet n'o ankounaomp ket. ”

Miz du : miz an Anaon, hag ive miz an Holl-Zent. Na zispartiomp ket an eil gouel diouz egile!

Gwir eo ar c'homzou, skrivet gant ar barz, hag hon eus lennet uheloc'h : ne lavaront koulskoude nemet ar pezh a wel daoulagad ar c'horf. Hon tud hag o deus kuitaet ar bed-mañ a zo astennet er bez yen ha didrouz, ya! o c'horfou da vihana... Met an ene, ar pezh a ra talvoudegez an den, n'emañ ket er bez, n'eo ket maro!

An ene, gant e spered, e volontez, e c'halloud da garet ha da vevañ, a jom beo, da virviken.

Ar maro ne diz nemet ar c'horf : an ene a zo graet evit ar vuhez beurbadus!

E pelec'h e vev eneoù hon tud aet eus ar bed-mañ? Doue hepken her goar, hag a varn, gant lealded ha karantez, kement hini eus e vugale galvet gantañ d'ar gêr.

Marteze, daoust d'e garantez, eo bet ret dezañ barn lod eus e grouadurien d'ar poaniou peurbadus : ar re-ze o deus dibabet chom pell diouz Doue, hag hemañ ne c'hell netra nemet seveni an dibab o deus graet en holl frankiz : gwasa-a-ze evito! Ni, kennebeut, ne c'hellomp netra evito, nemet tenna eus o buhez hag'o maro, eur gentel talvoudus evit kemer an hent mat.

Lod all, karantezus e keñver Doue, n'int ket c'hoaz koulskoude na santel na dizle awalc'h da gemer perz e buhez ar baradoz : gortoz a rankont hag'en em zizlea dre ar boan, ar binijenn, nac'het war an douar-mañ. Met karet a reont bremañ ar binijenn-ze, rak gouzout a reont evit petra e c'houzañvont ha petra a gavint warlerc'h... Ar re-ze n'o ankounac'haomp ket, rak kals vad a c'hellomp ober dezo, evit berraat o foaniou, dre an oferenn, pedennou an Iliz, hor pedennou hag hor poaniou kinniget evito... Bleuniou a zo kaer war o bez da viz du, eur bedenn avat graet evito he devezo kals muioc'h a dalvoudegez, hag a vezo gwelloc'h testeni a garantez eus hor perz!

Ar re all, mignoned karantezus an aotrou Doue, a zo leun a vuhez er baradoz : da viken emaint bremañ o veva gant o Zad, e kichen ar C'hrist, ar Werc'hez Vari, an Aelez hag ar Zent, o kemer perz e eursted an Dreinded, eun eursted ha n'he deus ket he far war an douar-mañ, hep an distera koumoulenn, dienkrez meurbet...


Ar re-mañ ive, n'o ankounac'haomp ket : soñjomp emañomp marteze o leñva war hon tud hag a zoug eul levenez dispar war o zal. Tud koz, kerent, priedou, bugale... aet int diouzomp, hervez daoulagad hor c'horf; met beo int hag eus peseurt buhez, dre vadelez Doue! Eus barr an neñvou e kendalc'hont ive da veva ganeomp-ni, e unvaniez ar C'hrist, d'hor c'haret, d'hor skoazella.

Ha ni, ha gouzout a reomp beva ganto evel gant tud leun a vuhez?

Y.-F. ar FALC'HUN.

(*) Ar varzoniez-mañ, tennet eus « War an Daoulin », levr Y.-B. Kalloc'h, a zo bet troet eus ar gwenedeg e yez Leon gant Kerlann.

(1) Groez = groaz. — (2) Gwecharall = gwechall. — (3) Gante = ganto.
(4) Barrou = skourrou, brankou. — (5) Goulli = goullo. — (6) Beg = genou.



...Ar mor a oa o fark
Ar mor a zo o bez...

Goueliou ar Miz

1 A VIZ DU : GOUEL AN HOLL ZENT. — “ Euruz, eme Hor Zalver, ar re a zo paour a galon... ar re a zo glan... ar re a zo trugarezus ”... Ar Zent a zo er baradoz a lavar deomp kement all ivez. Enoromp anezo, selaouomp o mouez, hag e-lec'h mont da glask an eursted hag al levenez gant ar bed, evel ma ra, siouaz, kement a dud dirollet ha diskiant, klaskomp anezo e-lec'h m'e-maint e gwirionez : gant an Aotrou Doue.

2 DU : GOUEL AN ANAON. — “ Breudeur, kerent ha mignoned, en an' Doue hor selaouet, en an' Doue hor sikouret ”... Goude beza enoret Sent ar baradoz, deomp d'ar vered, pedomp evit an Anaon kêz a zo o c'houzañv e tan ar Purgator, ha soñjomp ervat pege fur eo an hini na bec'h ket, pe a ra pinijenn er bed-mañ raktal evit ar pec'hejou en deveze graet.

6 DU : SANT ILDUD. — Ar Zant-mañ, eun deiz, a reas d'ar mor mont war e giz demdost da Lanildud... Eur mor a fallagriez a garfe ivez en em leda hirio war hor Breiz karet. Dale'homp penn dezañ, ha pedomp start sant Ildud da zont d'hor sikour.



7 DU : 25^{et} SUL GOUDE AR PANTTEKOST (5^{et} GOUDE GOUEL AR ROUANED). — “ Dastumit da genta an draog ha stlapit anezañ en tan; met ar gwiniz, lakit anezañ em c'hrignol ” (Parabolenn an draog hag ar gwiniz)... Petra eo hon oberou? Gwiniz, da lavaret eo oberou santel, mat evit ar baradoz? Pe draog, da lavaret eo oberou didalvez, mat evit tan an ifern?

14 DU : 26^{et} SUL GOUDE AR PANTTEKOST (6^{et} GOUDE AR ROUANED). — “ E gwirionez e gwirionez; m'hel lavar deoc'h, kement tra a c'houlennoc'h en ho pedennou, kredit e vo roet deoc'h, hag ho pezo ho koulenn ”... Kredit! eme Jezuz... Daoust ha kredi a reomp? Pa vezomp o pedi diouz ar mintin ha diouz an noz, araok ha goude ar prejou, en oferenn da zul, daoust ha komz a reomp ouz Doue gant evez, gant fisiañz, evel ma oar komz eur bugel d'eun Tad leun a c'haloud hag a vadelez?

19 DU : SANTEZ ELIZABED A HONGRI. — Ar zantez-mañ a zo marvet d'an oad a 24 bloaz : n'eo ket bet pell oc'h en em zantelaat e kreiz ar bed! Ha ni, perak'ta e chomomp atao ken klouar ouz an Aotrou Doue ha ken lezirek en e zervij? N'emaomp ket re ziwezat e elato evit staga da vat d'al labour. Santez Elizabed, pedit evidomp!

21 DU : 27^{et} SUL GOUDE AR PANTTEKOST (24^{et}). — “ Poblou an douar a welo neuze Mab an Den'o tont war goabrennou an nerv, galloudus ha skedus meurbet ”... Tud 'zo, hirio dreist-holl, hag a vez ano ganto bepred eus fin ar bed : “ N'eus mui nemet trubuilh e pep lec'h, emezo : emañ fin ar bed o tont ”! N'eus den ebet hag a ouezfe peur e vo fin ar bed; met ar pez a ouzomp ervat eo e tevio eun devez bennak, ha neuze Jezuz a varno an holl, hag a roio da bep hini hervez e oberou. Heuliomp eta e lezennou hag e roio deomp eun degemer mat.

28 DU : KENTA SUL AN ASVENT. — “ Deuet eo an eur evidomp da zihuna, rak tostoc'h emañ bremañ hor sikvidigez ”... Gant ar zul-mañ e krogomp en eul lodenn nevez eus ofisoù an Iliz, an hini a dle hor prepari da reseo mat Hor Zalver da zeiz Nedeleg. Dihunomp eta, dilezomp ar pec'hed evit mat, ha renomp pelloc'h, eur vuhez santel!

AN TAD



PSALMOU ar BINIJENN

32 vet Psalm

Beati quorum remissae sunt iniquitates...

Eürus an neb a zo lamet kuit e bec'hed,
Pe warnañ, gant Doue, eur c'holoenn taolet,
An den gwenn e galon da zaoulaged Doue,
An den didroidell hag eeün-tenn e ene.
'Pad m'eo bet va fec'hed dalc'het ganen e kuz,
Va eskern a vreine, yudal a raen spontus,
Rak ho tourn am gwaske, hag en noz hag en deiz,
Ha sec'h-korn e yelo va banne gwad em c'hreiz
Añzao 'ris va fec'hed; ar golo a lamis
Diwar va fallentez; ha lavarout a ris :
Me a fell din diskiuilh va fec'hed da Zoue,
Ha c'houi'walc'ho raktal loustoni va ene.
Ra zeuio pep den mat da ober kement-all.
Da ziskuilh e bec'hed hag e holl daoliou fall,
Araok m'en do Doue troet e gein dezañ.
Ha neuze pa stago an holl steriou ledan
Da vont diwar o hent, ha da c'holoi pep tra,
Ne c'hoarvezo gantañ an droug an distera
Ennoc'h o va Doue e vezan o kuzet,
Hag eus a greiz ar wask, ganeoc'h me 'vez tennet.
C'houi eo an hini 'ra d'am c'halon baour tridal;
Rak c'houi a zo bepred war zav ouz va diwall.
Mont a ran d'az kelenn, da ziskouez d'it da hent :
Heuilh anezañ hep aoun, ha na vez ket dizent.
Ne fell ket din tenna diwarnout eul lagad,
Ha rei dit a garfen kuzul, aliou mat.
Klev ganen kement-mañ : heñvel-poch na vez ket
Ouz ar marc'h, ouz ar mul n'o deus ket a spered,
Ha n'hellez da vlenia, na lakaat da dostaat,
Nemet war o c'harvan az pe eur westegn vat.
Niverus ar poaniou a gouez war an den fall;
Met an den hag en deus eur fiziañs start divrall,
E Doue, a bep tu, a gavo karantez.
Tud leal, e Doue, lakit ho levez;
Tridit, kalonou eeün, grit laouenedigez.

F. GUIVARC'H.

E niverenn miz Kerzu, e Krogimp
gant "TENZOR AN DINTIN GOZ"
romant gant Ab-Sulia.

An Aotrou 'n Eskob DUPARC (1857-1946)

AN AOTROU DUPARC GRAET ESKOB (1908)

An Ao. Dubillard, eskob Kemper abace ar bloaz 1900, a voe, gant deizioù diweza ar bloavez 07, lakaet gant ar Pab Pius X da arc'heskob Chambéry. Ha kerkent e paras sellou an holl e Breiz wardu an Oriant : eno oa eur person hep e bar, gouiziek, helavar, dispons, gwir dad e barrez. Petra 'vanke dezañ evit beza tad eun eskopti ? Netra ken nemet beza dibadet gant Vikel Jezuz Krist.

Ne voe ket pell da c'hortoz. D'ar 17 a viz genver 1908, e voe galvet an Ao. Duparc da Wened, evit reseo ar c'helou-meur digant e eskob.

Ezomm ebet da lavarout pebez kalonad a zantas tud an Oriant o koll o ferson karet. Met er c'hontrol, nag a lore'h hag a levez gant beleien ha kristenien Kemper ha Leon ! Gwelit 'ta rener Feiz ha Breiz oc'h embann an dra : " Doue 'ra vezo meulet ! Eun Eskob hon eus, eun eskob evel ma c'hoantas hor c'halon : eun eskob Breizad !... An eskob a zeu davedomp hon anavez mat, Breizad ma'z eo evelomp penn da benn. Gwad Breiz a zo en e wazied; ganet eo en hor bro, savet ha maget en hon touez. War barlenn e vamm en deus desket komz hor yez. O ! na pebez dudi evit an dud act war an oad ! Abaoe hanter-kant vloaz n'o doa ket klevet eur ger brezoneg o koueza eus muzelloù o eskob... "

Ha goude beza merket perziou mat an eskob nevez, e skrive c'hoaz : " Eur mank bras en deus koulskoude : ne oar ket espern e yec'hed pa vez ano da labourat evit Doue ha mad e vreudeur. Bremañ 'z eus eun nebeut bloaveziou, ar skuizder a stlejas anezañ war e wele hag her c'hasas demdost d'ar bez. Ne zavas ac'hano nemet dre virakl. Doue ha santez Anna her mire evidomp-ni, Kerneviz, Leoniz ha Tregeriz. "

AR ZAKRIDIGEZH HA DIGEMER E BOBL

Da geñver ar 25 a viz c'houevrer, gouel an abostol sant Vazeaz (Mathias), e voe sakret Eskob nevez Kemper ha Leon, en iliz Santez-Anna-Wened, e-lec'h m'en doa tremenet e vloaveziou hirra ha kacra, evel deskard nag evel kelenner : dindan paeroniezh Mamm ar Vretoned e fell dezañ lakaat e eskobelez. En-dro da vikel-vras Kemper, an ao. Fleiter, e oa deuet beleien eus an eskopti, dre gantchou. E-kreiz merenn, o Eskob nevez en em droas outo da lavarout : " Aotrou vikel vras, aotro-

nez chaloned ha personed, ha c'houi holl va mignoned eus Kemper ha Leon, en em anaout a reomp dija. Betek-hen, koulskoude, n'omp en em gavet asambles nemet da vare an ehan, pa'z aen d'ober eun diskiuza e kostez Kemperle. O ! berr 'veze an amzer-ze... Hiviziken, n'eo mui evit ehana ez in davedoc'h. An Aotrou Doue a fell dezañ ez afen bremañ evit staga d'al labour... *Meulet ra vezo Jezuz-Krist !* Hennezh a vo hor ger-stur... Pe hir pe verr e vo hor buhez, ra vo holl, penn da benn, evit gloar Doue ! "

D'an 10 a viz meurzh e teuas Eskob Kemper da azeza *War gador Sant Kaourantin*. Eur mor a dud a ziredas da gêrbenn Bro-Gerne evit gwelout an Tad digaset gant Doue d'an eneo hag evit youc'hal dezañ o c'harantez. En e brezegenn, e kemeras war e ano ar pezh en doa lavaret eun eskob e Pariz : " Ar Stad a zo dispartiet diouz an Iliz, met an Iliz n'eo ket dispartiet diouz ae bobl. " Pa zeuas er-maez eus iliz Sant-Kaourantin, e welas kement a dud dirazañ, ma kavas gwelloc'h ober war droad an hent betek ti Sant-Jozef, e di hiviziken. Erruet eno, e chomas a-zav evit trugarekaat e bobl fidel : " Bevet an Aotrou 'n Eskob ! " a vos respontet dezañ. Met heñ : " Eur youc'haden all a garfen klevout ganeoc'h : Bevet Jezuz-Krist ! " Ha, betek teir gwech, e voe evel eun tarz kurun : " Bevet Jezuz-Krist ! "

Diou gador-eskob, diou iliz-veur a zo en eskopti Kemper ha Leon, ha setu perak ez eas an Eskob nevez *da Gastell-Paol*, d'ar 26 a viz meurzh. Disheñvel diouz hini Kemper, met ken dispar all, e voe eno gouel an digemer. Pignet er gador, an Eskob, goude e brezegenn e galleg, a roas e-unan eun diverra anezi e brozoneg, en eun doare fraez hag aes da glevout d'an holl, ha setu e gomzou diweza : " Leoniz, dougit enor da gement 'zo deuet deoc'h digant ho tadou koz. Rak Doue, pa daol eur zell war ar bed evit gwelout e pelec'h e kavo e wella servichreien, e zaoulagad a gouez war ar Frañs; hag er Frañs, pa glask ar c'horn douar ma'z eo ennañ ar gwella karet ha meulet, e zaoulagad a bar war Breiz-Izel; hag e Breiz, e pelec'h e kavo e wella mignoned, Leoniz a c'hell sevel en o zav ha lavarout a vouez uhel : Ni eo ! Leoniz, fier oun da veza hoc'h Eskob ! "

(Da gendere'hel)

P. Y. NEDELEG



Savomp hon daoulagad etrezek ar stered

Gant J. Seite

Sklaer eo an noz : n'eus ket a loar. Dirazoun, eur mor sioul, o tont da lipat ar c'herreg a zifenn an tevenn.

A-gleiz hag a-zehou din, touriou-tan an Enez-Werc'h ha Batz o teurel o bannou sklerijenn an eil goude egile.

Ar stered a sked, henvel ouz tachou aour e bolz an neñvou.

Kaout, a ra deomp gwelet eur milion a stered gant hon daoulagad, ha koulskoude, hep sikour ar binvioù da greski ar gwel, n'hellomp e gwirionez niveri nemet wardro 3.500 steredenn el lodenn eus an neñv a dizomp eus Breiz.

Gant lunedeier, e teuer a-benn da baka betek 120.000; gant eun teleskop (ar benveg a gresk ar muia ar gwel), ez eer betek pemzek-kant milion (1.500.000.000).

Eun niver bras e gwirionez, ha c'hoaz n'eo seurt ebet, pa zohjer en niver sebezus e stered a jom kuzet ouzomp pell-pell e strad an neñvou.

Abaoue an amzer bella a ouzomp, ar stered o deus dalc'het kompagnunez d'ar bastored, d'ar vartoloded, d'ar veajourien. Diskouez a raent dezo an hent war zouar ha war vor.

Tud an amzer goz, eus ar Gres hag eus Rom, o deus roet dezo anolou sebezus : Altair, Arcturus, Aldebaran...


Eur steredoniour (den hag a studi ar stered) eus an Ejipt, a renke ar stered diouz nerz ar sklerijenn a daolent : ar re a welomp gant hon daoulagad n'int nemet eus ar c'houec'hvet renk!

Liou ar stered a zo meur a hini anezo, hag a zeu eus an herrder a zo ganto en o beaj a-dreuz an oabl : eun tamm houarn lakaet en tan, a vez ruz-teñval da genta; ma vez tommet c'hoaz, e ya war wennaat atao, betek dont da veza gwenn skedus dre ar c'hor. Evelse eo ivez evit ar stered.

Ar steredenn ruz eo an hini a zo an nebeuta gor enni : e Aldebaran, en diavaez, ez eus 3.000°. Goudeze e teu ar stered melen, gant 6.000°, evel Capella; hag ar re domma, glaz-gwenn evel Epi, eus Bali ar Werc'hez, a bak 20.000°. Nebeut a dra eo eur forn c'horet e kichen bounnez!

Ar bras eus ar stered a zeblant evidomp kaout an hevelep ment. E gwirionez ez eus eur c'henn bras etrezo. Unan eus ar re vihana, Betelgeuse, he deus a ledander 480.000.000 (480 million) a gilometrou, da lavaret eo 30.000 gwech hini an douar. Ha c'hoaz, ar steredenn-ze n'eo netra e kichen Alpha : ma vefe lakaet houmañ e plas an heol, an douar en he c'hichen ne vefe netra nemet eur c'houennenn.

Milionou a stered o redek gant tiz a-dreuz an neñvou! En em c'houlenn a c'hellfer penaos ez eus plas evito holl, bez' ez eus koulskoude eur plas bras-spontus etre pep steredenn. Lakomp teir gwenanenn a-zioc'h an Europa a-bez : stankoc'h eo evelse ar gwenan en er, eget ar stered en oabl, en eur zerc'hel kont eus ment Europa, hag eur wenañenn eus eun tu, ha ment eur steredenn ha bolz an neñvou eus an tu all.



An heol, unan eus ar stered bihana, a zo a-vec'h 150.000.000 kilometr eus an douar. Pelloc'hik e kaver Pluton, a zo 6 miliard a gilometrou diouz an heol... Goudeze n'eus netra epad eur pennad mat : 40.000 miliard a gilometrou a ranker ober araok degouezout gant Alpha; diou wech pelloc'h, goudeze, eman Sirius... Ar sklerijenn, ha ne laka nemet 8 munutenn da zont eus an heol betek ennomp, en eur ober 800.000 kilometr bennak bep segondenn, a lak 8 vloaz da zont eus Sirius betek an douar!


An takadou sklerijenn a sked epad an noz a-us d'hor penn n'int nemet eul lodennig vihan eus dremmwel an neñvou. Kals pelloc'h e welomp eul lostennad sklerijenn o kelañ ar volz : Bali Sant



Va c'hoefig gwenn



Gwe-chall pa oan er gêr, va c'hoef-ig gwenn, Me



gar-ie di-bre-der, va c'hoef-ig gwenn, Mont d'an o fi. sou san-tel,



gant Ma-rian-ig, Va c'hoar vi ha nik, Gwis. ket hor c'hae-ra



man-tell, hag hor c'hoef awenn.

I

Gwechall, pa oan er gêr, — Va c'hoefig gwenn,
Me garie, dibreder, — Va c'hoefig gwenn,
Mont d'an ofisou santel
Gant Marianig
Va c'hoar vihanik,
Gwis ket hor c'hae-ra mantell,
Hag hor c'hoef gwenn.

II

Bremen p'oun deut, siouaz, — Va c'hoefig gwenn,
Da jom en eur gêr vras, — Va c'hoefig gwenn,
E' vije c'hoant e trokfen
Koef Breiz-Izel
Ouz tok eur strinkell :
Nann, ne zilezin biken
Va c'hoefig gwenn!

III

Ha pa zavin d'an neñv, — Va c'hoefig gwenn,
Me gaso di ganen va c'hoefig gwenn.
Ah! Nag e vo souezet,
Ha dihanet,
An dud kurunet,
P'am gwelint me degouezet
Gant va c'hoef gwenn!

Jalm pe Sant Jakez eo, eur sklerijenn o tont eus meur a gant viliad a stered, re bell diouzomp evit ma c'hellfemp o gwelet a-unanou.

An heol, ker bras da welet, n'eo nemet eur steredennig, kollet etouez ar stered, -nemet evidomp-ni, -hag an douar a zo kals bihanoc'h c'hoaz! Pa zohjer ez eus stered ha ne zegouez o sklerijenn ganeomp nemet a-benn 18.000 bloaz, ha zoken 184.000 bloaz, e kaver peadra da jom sabatuet!

Dirak an traou sebezus-se, piou na deufe ket da zohjal en Hini en deus o renket evelse... N'eo ket gwall ziaes nac'h Doue etre peder moger eur gambr, savet gant galloud an den gwall zister avat ec'h en em zanter pa zeu d'an den sevel e zaoulagad etrezek an neñv, pa wel o skedi a-us d'e benn stered an Aotrou Doue : pa oar petra int, penaos ne gavfe ket enno an testeni a-bouez, mar deus unan, eus galloud divent ar C'houer.

J. SEITE.

PAJENN AN EMZAO KATOLIK

Pegen buhan he deus troet rod an amzer!

Miziou ha deiziou hañv, nijet int kuit, evel eul luc'hedenn, o kas gant eun tam-mig eus hon hunvreou hag hon eurusted a dud.

Nag a boan o kredi emañ adarre war dreuzou ar goañv hir ha teñval!

Ha koulskoude, gweñvet eo ar bokedou er parkeier, tremenet mar ar pardonioù. Goude eun distag a bevar miziad, oberou kristen ar barrez a zihun a-nevez, hag a c'halv da labourat enno an dud yaouank, kouls hag ar re en oad.

Warlerc'h eost ar c'horf ez eus ezomm da zastum ive peadra da vaga buhez an ene :

„ Savet, savet, Bretoned;
an emzao katolik

„ a c'halv d'al labour!... ”

Hed ar goañv diweza, strolladou an emzao katolik o doa bet tro da studia, en o bodadegou, an doare gwella da ziazeza ar peoc'h en dro dezo : peoc'h ebet en den ma n'emañ ket doujañs Doue er galon; peoc'h ebet etre ar rummadou tud, ma ne zenter ket ouz, lezennou ar justis hag ar garantez...

Er goañv-mañ, an dachenn a c'hou- Jenner pleustri warni eo dont da gompren gwelloc'h an devez-sul : *petra eo ar zul?* Pehini eo, en devez-se, lodenn Doue, ha pehini lodenn an den?

Setu eun danvez labour a bouez bras evit hon amzer a welomp enni enebourien hor feiz oc'h en em zifreta kement da zistroada ha da ziskar ar zul; hag e welomp ive, siouaz, ar gristenien o-unan o rei an dourn dezo, re alies. Kristenien berr a spered ha ne gomprenont mui pinvidigez ar zul, kaerder eun deiz bet roet d'an dud gant o C'hrouer, evit brasa mad o c'horf hag o ene, evit nijal dreist fank ha spern ar bed-mañ.

Kristenien dall ha ne welont ket emeur o tenna diganto, tamm ha tamm, ar pez a c'hell ober o enor hag o levenez er vuhez!

Eur zul dizoue ha dibedenn, ne glasker mui ennañ nemet karga ar galon gant karanteziou, an douar, gant plijadurioù ar c'horf, peseurt levenez wirion a c'hell degas d'an den? Peseurt nerz eo gouest

da rei dezañ da labourat ha da zougenñ samm ar vuhez?

Lavaromp dioustu n'eus ket diou eie-nenn a eurusted, n'eus nemet unan : an hini a gaver o pignat war-zu Doue, an hini a gaver o tiskuiza war e galon.

Pa c'houllonder ar zul eus Doue, an den eta, ne ra nemet ober e walleur. O siaga e galon evel ma ra ouz madou ar bed, ne ra nemet kreski e zec'hed a eurusted.

D'ar mare m'emañ ar zul o kostezia e pep lec'h, zoken er parrezioù chomet kristena betek-hen, pa glask an dud digredenn teurel o c'hrabanou warnañ evit e louza hag hen diframma diganeomp; mouez hon Tad santel ar Pab he deus tregernet evit merka da bep kristen e zevel :

„ Ar zul, emezañ, a die dont a-nevez, da veza devez an Aotrou Doue, devez a veuleudi d'e ano, devez a bedenn, devez a ehan evit ar c'horf, a vagadurez evit an ene; an devez m'en em vod laouen ar familh en dro da daol ar gêr.

Deuet eo an eur ma tle pep hini stourm da adsevel an devez sul, da rei dezañ e blas, e dalvoudegez hag e sked. Er brezel a zo etre bugale Doue ha mevelien an Droug-Spered, an trech a joimo gant ar gostezenn he devezo gouezet beza mestrez war ar zul ”.

Komzou Vikel Jezuz-Krist a zo sklaer. Ne c'hellomp ket ober skouarn vouzar outo, hep beza treitourien d'hor panniell.

Hon tud koz, an dir war o zal, ar groaz war o c'halon, ar c'hleze en o dourn, a yeas gwechall da ziframma bro venniget an Douar zantel, ma vevas enni Hor Zalver, eus a dre daouarn ar Vuzul-maned... N'eo ket gant armou dir hag houarn eo e c'houllenner diganeomp-ni sevel hirio; n'eo ket evit mont da bell-bro. Nann! Galvet omp da stourm en hor stad a vuhez, e-touez hor c'hen-vroiz, War dachenn ar barrez, evit nevezi ar zul, evit ober anezañ ar pez en deus c'hoantaet hor C'hrouer evit hor mad : devez Doue, devez an ene, devez ar familh.

Ar zul a rank beza kristen, reizet her-vez Doue, ma fell deomp e teufe ar peoc'h, ar garantez, ar vuhez vat, da c'houñt war an dizurz hag ar fallagriez.

Difennomp ar zul! Ar zul hon difenna ivez!

L. BLEUNVEN.

AR VRETONED ER-MAEZ EUS BREIZ

E Kemper, d'an 30 a viz eost diweza, ez eus bet eur c'hendalc'h diwarbenn ar Vretoned aet er maez eus Breiz, an divroerien (émigrés), evel ma lavarer : klasket ez eus penaos skora ar gevroiz-se... Eur gudenn eo hag a zell ouzomp-ni holl, Bretoned, rak n'eo ket dereat da vreudeur en em ankounac'haat war zigarez m'emaint pell an eil diouz egile. — Arzel Gervorvan, hag a oa er c'hendalc'h, a zisplego al labour, graet pe da ober, da lennerien Kroaz Breiz.

“ E Kastellin out bet, a c'houlenne Per ouz Arzel, o tiskenn eus an treñv? — Nann, eus Kemper eo emañ o tont.

— Hañ! O kaout ar Prefed pe an Aotrou 'n Eskob out bet neuze, sur awalc'h, rak doare az peus da gaout eur zamm war da spered!

— Divinet az peus, Per... N' am eus gwelet na Prefed nag Eskob, met o kemer perz oun bet er “ C'hendalc'h evit divroerien Vreiz ” (Congrès de l'émigration bretonne).

— Petra eo an dra-ze, an divroerien? — An divroerien, Per, eo an dud a rank kuitaat o familh hag o bro, evit mont da glask o bara e lec'h all, pell, er c'hêrioù pe war ar maez.

— Gwelet a ran, ya... Soñjal ez eus tud, eme Ber, hag o deus amzer da goll gant an divroerien villiget-se! Ma vije bet c'hoaz eun toulladig brao anezo, lakomp eun 10.000 d'an nebeuta!

— Aze avat, Per, emañ gwall bell eus ar gont! A viskoaz am eus bet kredet e oa kals kals divroerien eus Breiz. Met gant ar pez am eus klevet er mintin-mañ eo chomet va genou war nav-eur-hanter... Soñj 'ta, Per, ez eus d'an nebeuta 600.000 Breizad er maez eus Breiz, war zouar Bro-C'hall hepken, hep konta ar re a zo er broioù estren!

— N'eo ket gwir evelato! — Eo, re wir, Per! Netra nemet e Paris, ez eus dija 400.000 bennak anezo. Er maez eus Breiz, ez eus eta tud awalc'h da bobla eun Eskobti bras : c'houec'hvet eskobti Breiz a vije hennez!

— Biskoaz n'am bije kredet!

— Etre 10 ha 15 mil Breizad a rank divroa evelse bep bloaz, hini amañ, hini ahont, an darn vuia war zu ar c'hêrioù hag ar porzioù bras. Ar re all a glask tiegeziou e kreisteiz Bro-C'hall.

— Evit konta an dud-se eo ez out aet da Gemper, Arzel?

— Pell 'zo eo graet al labour-ze! Nann! Met evit gwelet petra a vo gelllet ober evito!

— Evito... evito... Daoust ha n'int ket bras awalc'h d'en em zifreta o-unan? Piou a zo bet o lavaret dezo mont kuit?

— Gortoz, gortoz, Per. Re brimm out eun tammig, evel ma lavarez... Breiz a zo eun douar pinvidik, ha nebeut 'zo eo pinvidikaet c'hoaz. Met eur vro poblet-stank eo ivez. N'eus ket a blas er gêr da holl vugale ar Vretoned!... An darn vuia eus an atañchoù n'int ket bras awalc'h da veva ouzpenn eur familh, ha ma c'hellfent hen ober, ar familhoù n'en em gle-vont ket, alies, kenetrezo en hevelep ti... Ar re yaouanka a rank eta mont da glask fred. Ha rouez eo ar re o deus chañs da gaout labour tost d'ar gêr, evel m'az peus-te kavet wardro an tiez gwall lakaet e Brest!

— Gwir eo... met me 'm eus gouezet en em denna, me! Hag ar re-ze, ma kar-fent a rafe kement all!

— Bez 'ez eus hag a ra, Per... Met re nebeut a zo anezo. An darn vuia a ra aferioù fall er-maez eus o bro. Ne lavaran ket e vijent holl rivinet, ar pez a zegouez koulskoude re alies... Met madou all a zo estreget an arc'hant : eur vicher vat, eur wreg vat, eul lojeiz dereat, yec'hed ar c'horf, yec'hed ar spered, yec'hed an ene. Ha nag a draou all! Eun dra o deus kollet, eun dra talvoudus ha ne gavint mui peurliesha ken : o Bro-Vreiz, bro o c'ha-vell... Ne zeuint ket da gonta deomp o zrubuilhoù nag o melkoni, nann sur! Met deomp-ni ep kaout ar skiant da gompren... Bretoned int eveldeomp, Bre-toned e vezont muioc'h egedomp awe-chou. Arabat eo deomp ober fae warno, ni hag a c'hell chom e kreiz eur binvidigez brasoc'h eget ma' kav deomp... Eur vez eo soñjal pegen nebeut e klaskomp en em harpa an eil egile, kenetrezo, Bre-toned.

— Ar wirionez 'zo ganez, Arzel... Moarvat omp bet digalon betek bremañ, hag e rafe vad deomp cheñch penn d'ar vaz. Met daoust hag e c'hellomp ober eun dra bennak evit sikour hor c'henvroiz paour?

— Muioc'h eget na zoñj dit, Per! Pa roio pep hini e daolig skoaz, ne vo ket pell an traou o vont war wellaat... E Kemper eo bet boulec'h mat al la-bour dija, en dro d'an Ao. a C'hebrant ha d'an Aotrou Mevellec, aluzenner bir-vidik Bretoned ar C'heisteiz. Met warc'hoaz, Per, e kontin hiroc'h dit : poent eo mont d'al lochenn!

(Da genderec'hel)

Arzel GERVORVAN.

Petra eo ar Bleun-Brug?

GANT VISANT FAVE

DIWEZ

Goude beza displeget, en e brezegenn d'ar Vleun-Brugerien, e Kastell, d'an 22 a viz eost 1948, eo ar Bleun-Brug eun emgleo kristen evit sevel Breiz kristen en he feiz, an Ao. Chaloni Fave a gendalc'h evelhen :

Ouspenn 'zo : ni, Bleun-Brugerien a gemer hor bro en he feiz, gant he amzer dremenet en he feiz, evel m'eo merket gant an istor, — gant he amzer da-zont en he feiz, evel m'eo merket dezi gant Doue.

Ni a gred he deus pep pobl he flanedenn merket dezi gant Doue, evel m'eo deus pep den ha pep lignez tud.

Ni a gred n'eo ket planedenn gaera eur bobl mestronia poblou all, gwaska poblou all dindan he yeo... dastum pinvidigeziou bras diwar goust ar re all... nann! ar poblou a gerz gant an hent-se, goude beza astennet o galloud hag o levezon war zouarou bras, a gouez, alies hag abred, izelloc'h eget araok.

Ni a gred eo planedenn gaera eur vroad-tud kana eur Magnificat a c'hloar en enor an Aotrou Doue dre feiz ha santelezh he bugale, astenn rouantelezh Doue, stleja kroaz an Aotrou Krist dre ar bed hag he sanka doun, embann tro-war-dro dezi an Aviel a wirionez hag a garantez... Setu planedenn gaera eur bobl, goude ma rankfe, merzerez hag aberz, koueza he-unan war an dachenn d'an eur merket dezi gant Doue. Eul lignez a noblañs uhel he doa evel ger-stur « usque ad altare » (betek an aoter); petra a dalveze ar gerioù-ze? Komprenet e voe eun devez : n'oa mui nemet eur gwaz o tougen an ano koz, hag ez eas da veleg ha da eskob; maro oa al lignez, aet oa da vervel e-harz an aoter, « usque ad altare », d'an eur merket dezi gant Doue. N'oa ket a lec'h da geuzi!

Ni a gred eo bet kaer planedenn Vreiz en amzer dremenet, eur blanedenn speredel. Sellit 'ta ouz he istor. Met selaouit kentoc'h ar barz Bleimor : "Eun ero ho poa digoret e kornog ar bed koz,

Eun ero war ar mor;

Hag en ero-ze ho poa hadet Kelted. Aze edo ar greun ar gwella, ha C'houi a gemere bep bloaz

Eun dornad anezo, d'o strewi dre ar bed...

Bugale va gouenn a oa ho kreun, hag e kement douar m'o hadec'h,

E tiwane kristenien grefiv...

Samm ho Kroaz santel war e skoaz, ar C'helt en deus graet tro an douar.

Evidoc'h en deus treuzet pep mor, hag e pep aod en deus douaret,

Ha ken stank eo ar broiou hon eus savet enno ho Kwezenn a zilvidigez

Ma n'ouzomp mui o anioù.

E pelec'h emañ an tonn ha n'en deus ket pleget da dud va gouenn?

An enezenn c'houez ha ne gousk ket, ebarz, eskern eur C'helt?

Tan an abostolerez a enaouont er broiou holl! "

* *

Ya, ar broiou holl, met eur vro da genta, araok ar broiou all : Breiz a zo bet lakaet dezi gant Doue mor tro-dro evit ma ne vo ket kailharet he ene gant ar broiou all, mor tro-dro nemet ouz eun tu : tu Bro-C'hall. Hag hep dale Doue a zo plijet gantañ e vefestaget Breiz ouz Bro-C'hall, evel m'oa bet staget nebeud ha nebeud broadou bihan all, evit ober eur vro vras. Ha perak eta eo bet plijet kement-se gant Doue? N'eo ket nemet-ken evit ma rofe Breiz he bugale da labourat, ha bugale da vervel er brezelioù a laz; met ive, met dreist-holl evit ma rofe bep bloaz, dre zil, eun nebeud gwad nevez ha kristen d'ar Vamm-vro; ha ma c'hellfe evelse Bro-C'hall derc'hel he flas e penn ar pobladoù kristen, ha kas pelloc'h da glevet kelou mat an Aviel, o veza m'oa brasoc'h pobl, krefivoc'h he mouez hag he brec'h.

Setu aze planedenn Vreiz en amzer dremenet. Gouzout a ran n'eo ket hep koll nerz eo he deus Breiz roet evelse he zud hag he gwad : gwanaet eo he ene kristen er stourmad evit ar feiz, kailharet eo bet eun disterig, — kals zoken, — evel ma teu gloaz warlerc'h pep stourmad, ha gwanijenn da heul pep aberz; Doue en deus pouezet hag



Gouelioù

eur

"Bleun Brug"

e

Gwened

ar gaou graet ouzomp hag ar vad graet d'ar re all.

Gwella pezh 'zo, kreñv eo c'hoaz ene kristen Breiz' ha ni a gred n'eo ket eehu c'hoaz planedenn speredel hor gouenn : kenderc'hel a rank da astenn he levezon war Vro-C'hall a-bez, hag en tu all da harzou hor bro, dre ar bed. Rak evidomp-ni, kristenien, n'eus ket a harzou evit hol labour abostolerez.

Nemet neuze e lavaromp d'an dud a zo ouz hor gouarn :

Ne c'houlennomp ket gwelloc'h eget kenderc'hel gant hor planedenn : mouez Doue a glevomp c'hoaz ouz hor gervel; kredi a reomp e c'hell c'hoaz ar bugel-ma 'z eo pobl Vreiz e familh vras Bro-C'hall, pinvidikaat ha kreñvaat spered ar familh a-bez... Nemet neuze e rankomp beza sikourët da jom kreñv ha yac'h hon-unan.

Lezennou a zo bet savet hag a zeu da vonga ene kristen Vreiz, lezennou hag a zismant ar familhou, evel lezenn an divors : d'an traoñ e rankont mont! Lezennou war ar skolioù, a-enep ar gwir en deus pep kristen, ar paour evel ar pinvidig, da fiziout e vugale, da skolia ha da gelenn, e mistri-skol hag o deus an hevelep kredennou gantañ : d'an traoñ ivez al lezennou-ze!

Eur mor a gredennou faoz, eur mor a hudurniez hag a luc'haj a ziroll hep chan war hor bro gant kazetennou, levrioù, sinema, T.S.F.... Harp a rank beza lakaet ma ne fell ket deoc'h e kouezfe hep dale Breiz ken izel ha karterioù all a zo : neuze ne c'hellloc'h mui konta warnomp!

Traou all a zo hag a deu da skora ene kristen Breiz : hor boaz amañchou deomp-ni, hor yez dreist-holl, ar brezoneg : sikourit ac'hanomp d'o derc'hel beo ha skedus...

Hag e krogimp adarre gant hol labour, gant ar blanedenn merket deomp gant Doue : beza eun tour-tan

en noz, kana e ti-kaniri ar bed hor c'hantig deomp-ni a dregerno an hekleo anezañ dre holl, o tihuna en holl sperejou hag en holl galonoù mouez ar wirionez o vonga ar gevier, mouez ar furnez hag ar zantelezh o tinerza an techou fall hag o stourm ouz pep fallagriez.

Eun herez a briz bras hon-cus, eun herez broadel : met pa ne vo mui heritourien d'heñ reseo, d'e gompren, d'e binvidikaat, d'e embann... da betra e servicho an herez?

Ha goude ma ve Bretoned dre o gwad hag o ano, heritourien Breiz, ma ne vez mui spered ebet, ma vez mouget spered Breiz, ma ne vez mui herez ebet, da betra e servicho kaout heritourien?

Setu ar pezh a lavaromp d'ar re a zo ouz hor gouarn.

Met hor fiziañs a zo dreist-holl e Doue, rener bras ar poblou. Deuet omp hirio da bedi evit hor bro, hag e kemerimp adarre mouez ar barz Bleimor :

"Ha gwelloc'h e vo an traoù ganeoc'h [Aotrou Doue], pa ne vo mui Breiz ebet?

Goût a rit eo beo atao ganeomp an tan roet d'ar poblou en hoc'h Aviel;

Goût a rit eo glan, hag e sked hep ehan e noz-mik paganiez hon amzer;

Miret hon eus ho tan : evelse, mirit hor bro!

Breiz diskaret, eur piled nebeutoc'h a vo en hoc'h Iliz katolik,

War aochou ar C'hornog eun tour-tan nebeutoc'h evit ar poblou da zont,

Eur steredenn nebeutoc'h war an hent a gas da Vetelem ha da Rom."

[Itron Varia, Santez Anna, Sent ha Sentez Breiz, grit ma chomo ar Vretoned start en o feiz, ha ma vezint atao gwella ebet an Aotrou Krist ha gwella soudarded an Iliz dre ar bed!

Evelse-bezet-graet!



Eun dro lous



(Kontadenn klevet
ha renket gant L. B.)

Eur zulvez, en eun tiegez a vro Leon, an dud a oa aet d'an oferennbred. N'oa chomet er gêr nemet Soazig, bet en oferenn-vintin. Tra-awalc'h oa, pegwir n'oa ken d'ober nemet diwall an ti, teurel evez ouz ar pod bras o vervi war an tan, ha beilha ma vefe prest an traou e poent hag en amzer.

Epad pell, e chomas Soazig en ti, da lenn, da bourchu an tan, da renka pep tra evit lein. Laouen gant joa ar zul, e kane en eur ober e zammig labour. Etre daou e paras he daoulagad war pod an dour : goullo oa kouls lavaret.

Soazig a zellas ouz an horolaj : " amzer awalc'h, emezi, da vont betek ar feunteun en eur redadenn... "

Chacha a reas an nor eun tammig, ha skañv he zroad, evel eul lapous, ez eas en hent, dillo, ken dizoursi ha tra!

Degouezout a ra traou souezus awechou!

Eur c'hasker-bara, eun hanter laer, en doa gwelet ar plac'hig o vont d'ar feunteun.

C'houez vat ar zoubenn domm moarvat a roas naon dezañ : eun taolig skoaz d'an nor, hag heñ en ti, mar gouie.

E zoñj oa kas gantañ an tamm kig, a rofe kement a zaour d'ar bara zec'h a zebre alies...

Met kaer en doa furchal ar pod, sellet en armeliou, ne welas ket liou eun tamm kig!

Droug ennañ, e krog neuze er zac'h fars, hag e taol anezañ, a-gas, er c'henta toull a wel dirazañ, da c'houzout eo, en eur gwele kloz...

A-vec'h m'en doa al landruilhenn sachet gantañ e freilhou eus an ti, dre zor al leur, edo Soazig o kregi el loket war zor ar porz... Ar c'hi, ken imoret peurliesia ouz ar glaskerien-bara, ne fiñvas ket en e lok. Ar plac'hig ne zantas kenneubeut c'houez ebet eus an dro louz ar oa bet c'hoariet dezi.

Dienkrez kaer, hep sellet pelloc'h, e tostas ar c'heuneud ouz ar glaou, hag e tapas an tamm kig evit e deurel er zoubenn. Evit na deufe da freuza re, oa bet tennet er maez eur pennadig, ar pez a viras outañ, en deiz-se, da vont e sac'h hag e kov al laer.

Soazig en em zifrete bremañ da droc'ha a bara ha trempa ar zoubenn.

Dizale edo an dud er gêr, hag ouz taol : hini anezo ne gavas ar zoubenn na re yen, na re domm re sall na re c'hoular... " Mar bez kouls ar c'hig-ha-fars eo ar pez a ranker!

" Tennit ar fars er maez, ma torro e dan, eme an tad d'ar merc'hed, evit ma vo aesoc'h da vruzuna ha na vo ket skotet hor staoñ gantañ! "

Soazig a gemeras al loa vras hag a dosteas ouz ar pod-soubenn. Ne c'helle ket dont en he spered an distera douetañs eus ar pez a oa c'hoarvezet epad e zro er feunteun.

Met kaer he doa furchal ar pod, a-gleiz hag a-zehou, sac'h-fars ebet ne zispakas, nag a-dreuz nag a-hed. E pelec'h 'ta oa aet, dre beseurt toull oa lammet er maez?

Ruz he divoc'h evel eur gerezenn, e tizroas da lavaret, goustadik, eur ger bennak e pleg skouarn he mamm.

Houmañ, o klask difenn ar verc'h, a lavaras a vouez uhel awalc'h evit beza klevet gant an holl :

" Re sur oun, emezi, oa lakaet ar fars er pod! "

— " Ya, ya, eme an tad, oc'h harpa komz ar vamm; me 'm eus gwelet gant va daoulagad va-unan, lakaet ar c'haod er zac'h, hag ar zac'h er pod, epad m'oa o troc'ha va baro da vont d'an oferenn. Te eo moarvat, emezañ c'hoaz, o trei ouz e verc'h, n'out ket chomet ouz ar strapenn ma tiez beza! "

— " Eo 'vat ", eme Soazig, o tourlonkat.

— " Gevier, eme an tad. Ne vez graet, na ve gouezet! Diwall! "

Er zulvez-se oa bet prezeget war an douster hag ar basianted, ha setu perak ne voe laosket nonde na sakre ebet...

Ne dalie ket ar boan chom da vare'hata : ne ziwan ket a zier-fars er podou soubenn! An tad a grogas en dorz vara, a ziskolpas diouz penn an dorz eur pez tamm, ken teo ha pevar houarn ar gazez koz lakaet en eur bern.

" Grit evel-doun, paotred, emezañ, en eur droc'ha eur mell pastell kig druz, kement ha teod ar c'hole bras a oa o larda er c'hraou : e-giz all e reoc'h kov moan, ha n'eo ket brao da zul! "

Ma voe nebeutoc'h a gaoziou epad lein eget kustum, an traou koulskoude a yeas braoik en dro. Soazig hepken a jome eur bec'h war he c'halon : petra oa deuet ar zac'h-fars da veza?

Ar pardaez a deuas; koan a voe debret; ha, tra souezus, den ne gredas ober meneg eus abadenn kreisteiz.

Goude ar grasou, pep hini a yac eus e du, da gousket... Ar vamm hag ar verc'h a c'hede ma vije ar wazed diskennet pep hini en e lok ha mouget ar goulou, araok diwiska pilhenn ebet.

Neuze avat, pa voent goloet gant an deñvalijenn, e strinke buhan an dilhad diouto, hag e netra-amzer, edont o vont d'en em rodella, sioul ha kempenn, e touez o liñseriou.

Soazig a bignas da genta en he gwele-kloz...

Met a-vec'h gourvezet ennañ, e laosk eur youc'hadenn ken estlammus ma laka war zao holl dud an ti ha lod eus an amezeien dosta.

" Petra 'zo, petra 'zo, va merc'hig paour, eme ar vamm oc'h en em deurel ouz ar gwele hag o paka an elumetez buhana ma c'helle? "

Kenta tra a wel eo ar pez a vanke da lein. Ar spontailh, va zud keiz, oa ar zac'h-fars, ruilhet diwar an dorchenn war dreid Soazig.

Piou en devije soñjet e seurt tra?

Me ho lez da zivinout pebez strafuilh he doe ar plac'hig paour pa welas he zad gant e forc'h houarn, ar mevel gant e fuzuilh, ha tud an ti all o tont en ti o c'houlenn piou edor o laza...

Dare e voe diskleria an traou evel ma oant, hag, e berr amzer, istor ar zac'h-ars a reas tro ar barrez.

Epad meur a zizun, Soazig ne grede mui mont e touez an dud gant ar vez...

Ha karet a rafec'h gwelet kement all o c'hoarvezout ganeoc'h, paotr pe blac'h an oferenn-vintin? Nann! Mat, neuze, na lezit ket an ti e unan, evit mont da gerc'het dour-feunteun, na da welet e pelec'h eo toull ar yasin.

Meur a Zoazig a zo bet tapet, ha meur a hini all a vezo c'hoaz, ma ne dennont ket o mad eus ar gentel-mañ.

AR BREZONEG ER SKOL

Meur a wech hon eus bet tro da gomz e Kroaz Breiz eus kudenn ar brezoneg er skol, eur gudenn hag a dle tenna warni evez pep gwir Vreizad.

Goulennou niverus a zo bet kaset dija d'ar Gouarnamant, kouls gant Kannaded ar Gambr, hag ar C'huzulerien jeneral, hag ive strolladou Bretoned... Betek-hen, n'eus bet nemet skouarn vouzar.

Ouspenn Breiziz a zo e chal gant ar stad graet d'ar brezoneg, hag as poblou en dro deomp a zell gant enkreiz etrezek hor bro, hag a labour evit ar Vretoned.

Setu amañ da heul, eun testiñ muioc'h eus an evez a deurel warnomp. Degaset eo bet deomp gant ar Strollad "Mignoned ar Sevenadur breizad", eus Bro-Zaoz, hag a c'houlenn diganeomp rei da anaout da lennerien Kroaz Breiz ar gefridi o deus graet evidomp e kichen ar Gouarnamant. Daou skrid a zo : geriou eur c'houlennadenn (pétition) kaset da Rener ar C'huzul, e Paris; hag *eul lizer*, skrivet da heul ar c'houlennadenn, evit he harpa hag he displega.

I. — AL LIZER

D'an Aotrou H. Queuille, Rener ar C'huzul-meur, Palez Bourbon, Paris.

Aotrou,

An enor hon eus da gas deoc'h, amañ da heul, holl skridoù eur c'houlennadenn, sinet gant 3135 den, evit aspedi ho Kournamant da rei an urzioù dereat evit ma vo kelennet yez hag istor Vreiz en holl skolioù ar vro-ze.

Ar c'houlennadenn-mañ ne deu nemet a-berz Kelted an Enezeier, a vev e Breiz-Veur hag e Bro Eire (Irlande). Ar re o deus sinet a zo, dre vras, eun dibab etouez poblou a-bez o deus youl da welet ar goulenn-mañ sevenet. An degemer a vo graet dezañ a vo kemeret ganto evel eun testiñ e talc'ho Bro-C'hall, e-keñver o c'hendirvi breizad, da lezennou ar sevenadur (civilisation) en hon amzer, da re ar werinelezh (démocratie), hag ive d'ar reolennou anavezet dre ar bed evel re ar gelennadurezh hag an diorroadur (culture). Setu perak emaint war c'hed, gant enkreiz, eus ar pezh a ray ho Kournamant.

Eun niver bras a gelaouennou eus Eire ha Breiz-Veur, heuliet gant re all eus Amerika, her gouzout a reomp, o deus en o zoñj bruda dre ar bed an degemer a vezo graet d'ar goulenn-mañ. Fiziout a reomp e vezo eun degemer mat, ha dreizañ e vo laouenaet, sur awalc'h, n'eo ket hepen ar re o deus sinet ar goulenn, m'ive an holl dud a zo chalet gant kresk ar sevenadur, an deskadurezh hag ar werinelezh.

Poan hor befe o kredi e c'hellfe ho Kournamant nac'h da zeveni eur seurt goulenn ken talvoudus evit an araokaat.

Deoc'h, Aotrou, gant hon holl doujañs.

Sinet : Ar strollad-penn :

An Aotrou Arc'heskob katolik Mihangel Mac Grath, eus Cardiff (Kembre).

J. Gwyn Griffiths, Mestr war an Arzou, kelenner al Lizeri, Skolaj-meur Swansea (Kembre).

M. Ambrose Bebb, Mestr war an arzou, kelenner, Llwydiarth, Ffriddoedd, Bangor (Kembre).

James Mac Sparran, Bachelour en Arzou, bachelour el Lizeri, K. C. ezel eus ar Gambr Knocknacarry, Cushendun, Co. Antrim, Eire.

Daniel Breen, T. D. (Dail Fireann), 9 St. Kevin's Park, Dulenn (Fire).

Oscar Mac Uillis, Mestr war an Arzou, Sekretour jeneral ar C'hendalc'hou Etregetiek, "Inis Chaoin", Deilginis, Eire.

Dim. Mary P. Ramsay, Mestr war Arzou, Doktor eus Skol-veur Paris, Ofiser an Deska-durezh, 11, Plasenn Saxe-Cobourg, Edinburgh, Bro-Skoz.

Rev. T. M. Murchison, Mestr war an Arzou, Rener "An Gaidheal", 14, Bali Kinross, Glasgow, Bro-Skoz.

J. H. Miller, ezel ar C'hendalc'h "An Comunn Gaidhealach" hag ar Strollad "Dunc-din Society", Rener ar Strollad "Arz Keltiek", kelenner en Arz keltiek, 54 ball Arrowsmith, Glasgow, Bro-Skoz.

R. Morton-Nance, skrivagner, Barz-meur ar Gorsed Kerne, Chylason, Carbis, Sant-Erwan, Kerne.

Cormac O. Cuilleamain, Mestr war an Arzou, Ph. D., kelenner Iwerzoneg, Skolaj-meur Cork, Bro-Eire; Sekretour a Enor.

II. — Ar C'houlennadenn :

Poaniet o welet Gouarnamant Bro-C'hall o nac'h ma ve kelennet yez hag istor Vreiz er skolioù breizad, daoust d'an niver bras a c'houlennou graet gant an dud e karg er vro-ze,

Enkreizet e vefe ar Vretoned — heritourien koulskoude eus eur yez keltiek a briz bras, hag eus eun istor a zo o hini — nac'het outo beza mistri war an eil hag eben, hag anaout o feadra hag o herez, daoust m'eo dleet dezo hervez lezennou sklaera ar gwir hag ar sevenadur,

Ni, hag hon eus sinet an dra-mañ, a c'houlenn ouz Gouarnamant Bro-C'hall hag ouz Bro-C'hall ivez, ma vo kelennet dalc'hmataz yez brezonek el lodenn eus ar vro a gomz ar yez-se, hag ouspenn-ze, ma vo kelennet istor Vreiz abaoe he amzer gentañ, en holl skolioù ar vro, pegwir emañ kement-se e karg Bro-C'hall dre ma 'z eo gouarnourez Vreiz.

Ma vefe lezet hor goulenn dereat da goueza, e vo ret deomp, evel brogarourien eus ar broioù keltiek all, rei da anaout ar gaou hag an dislealded graet da yaouankiz Vreiz, ha d'ober goudeze ar pezh a vo kavet mat : rak neuze e vefe sklaer ne glask eur seurt politikerezh nemet kas da netra ar yez hag ar perzioù breizad, a zo koulskoude karet ganeompni ha talvoudus evit sevenadur ar C'hornog.

Sinet gant 3135 den.

Ne c'hellomp nemet trugarekaat hor breudeur tra-mor evit ar boan a gemeront da zifenn gwirioù Breiz, he yez hag he spered, ha unani hor pedenn gant o hini dirak ar Gouarnamant evit ma vo roet, pelloc'h, d'ar brezoneg ha da istor Vreiz ar plas a dlefe dezo beza kemeret pell'zo, e deskadurezh an holl Vretoned Yaouank.

Y-F ar F.

Lennit

ALAIN DE CORNOUAILLE : PENHOAD (Spes, Paris 1947, 442 pages).

GWENNAEL (aotrou Cozannet) : KLOTENNOU BREZONNEK. (1948). — (Mer goulenn digant M. l'abbé Luguern, directeur de l'Ecole Saint-Joseph, Plabennec (Finistère).

E gwerz e ti : « Ar Vuhez Kristen », Couvent des Capucins, Roscoff (Finistère)
C. C. 209-81 Nantes

(ar mizou-kas azo ouspenn ar priz merket)

Buhez Hor Salver Jezuz-Krist, gant an Ao. Uguen hag an T. Eujen.....	300 l.
Ar Were'hez Vari, gant an Tad Medard.....	100 l.
Fatima, gant an Tad Medard.....	100 l.
Sant Fransez a Aziz, gant L. Inizan, kresket gant an T. Eujen.....	200 l.
Bleunioù Sant Fransez (Floretti).....	100 l.
Buhez skeudennet Sant Fransez, gant an T. Eujen.....	80 l.
Sant Fransez, mignon ar vugale, gant Breur Melar.....	60 l.
Ar grasou pe ar pedennou dirak ar re varo, gant y ar Go.....	100 l.
Prezegennou war Drede-Urz S. Fransez (2 leor), gant an T. Eujen.....	60 l.
Santez Elizabeth a Hongri, gant an T. Eujen.....	15 l.
An oferenn displeget gant skeudennou, gant an T. Eujen.....	20 l.
Levrig-dorn Trede-Urz S. Fransez, gant an T. Eujen.....	30 l.
Diwar c'hoarzin, gant an T. Medard.....	100 l.

Ar prizioù merket emañ ne dalvezont nemet broman : Kemmet a c'hellont beza gant priz ar vuhez.

KOADACHOU EVIT AN TIEZ

ARREBEURIOU WAR C'HOULENN - ARREBEURIOU-SKOL

23 ha 25, Straed Rozière - KASTELL-PAOL

Tel. 2.50

C'HOARIOU

Respontou evit miz here :

Divinadennoù :

1. — Eur bourrenn. — 2. — Eur c'harr-dre-dah. — 3. — Eur wezenn. — 4. — Ar bleo gant eur roudenn awechou : ar chataligou a ouzer petra int!

N'eus kavet respont mat ebet evit kenstrivadeg ar gerioù-kroaz, n° 8! Klaskit ha chañs vat!

Da zibuna e miz du.

Divinadennoù :

1. — Evit eur c'higer, an tamm gwella. — Evit eur c'higer,...

Ma ne ra nemet mont ha dont, ar falla.

Ma ra nao dro araok, ar fura... Petra eo?

2. — Da biou ar gwella lavaret ar pezh a garfer kuzat?

3. — War an daol alies e vez troc'het,

Ha morse ne vez debret!

Gerioù-kroaz al Lagad-du, N° 6.

A-blaen :

1. — Merc'h nemeti.

2. — Rei kuzul. — A-gleiz (d'eur marc'h!).

3. — Evaj saoz. — Eno emañ ho spered.

4. — Beñveg kenta al labourer-douar.

5. — Hardiz. — Ragano-gour (pronom personnel).

6. — Araogenn displeget (préposition conjuguée).

Gerig dirak eur verb. (Rannig-verb).


7. — Ti Kemmet. Ger-mell dirak ti Rannig-verb.

Gerioù-kroaz

al Lagad-du, N° 4 :

	1	2	3	4	5	6
1	E	N	T	A	N	A
2	B	O	U	R	E	O
3	A	Z	D	O	V	
4	R	I	O	U	E	
5	Z		R	E	P	U
6				Z	A	R

1 2 3 4 5 6 7 8 9



A-serz :

1. — Pinvidigez ha boued Breiziz.

2. — Liester (pluriel) alar.

Roet gant ar yar.

3. — Ragano-gour. — 3/4 eus ATIZ.

4. — Klask naered.

5. — Lizerennou AEN kemmesket.

6. — Chom hep dispign.

7. — Eus ar verb REI.

8. — Ger-mell. — Danvez laon.

9. — Ti al labous.

TRAOU KLEVET.

Eur paotr yaouank hag an hini a vo martese, e dad-kaer.

Ar paotr yaouank. — Ne roit argoulou ebet d'ho merc'h evit he eured?

An tad-kaer : nann; daoust ha n'ho peus ket lavaret din alies oa va merc'h eun "teñzor"!

Augustin LAURENT
KASTELL-PAOL

A c'hell kas da bep lec'h :

Holl frouezou an douar - Frouez prim - Kaol bleunv

Artichaod - Ognon - Avalou-douar

(da hada kouls ha da zebri)

Kolo - Ludu

Tel. 1.34

LEORIEREZ SANT-KAOURINTIN

J. Guivarc'h mab

Straed Kereon, KEMPER

Téléph. 7-03

Levriou - skol

Pep tra evit ar skolidi

hag ar burevioù

Levriou - oferenn

Levriou - kan

Levraoueg

Poupées. Broderies

Le Minor

Pont-Sabbé

Bretagne

Lans da Vicheriou ar Vro

Mark ar Berr "à la Ville d'Ys" (Ker-Is)

16, Boulevard Kerguelen (e-kichen ar Post). — KEMPER

Pour Tout
ce qui
concerne
la PHOTO

POUILLOT-EHANNO

PONT-L'ABBÉ Téléph. 1-21

ON SE DÉPLACE SUR DEMANDE

POMMES de TERRE - GRAINS - ENGRAIS - FOURRAGES

Alain PÉRON

57, Rue Ernest-Renan, PONT-L'ABBÉ (Finistère) — Téléphone 24



LIBRAIRIE LE DAULT

16 bis, Rue René-Madec - QUIMPER

LIVRES - GRAVURES - ANCIENS & MODERNES
Tout sur la Bretagne

Achat de Livres (et de vieilles reliures)
se rend sur place à ses frais

Imprimerie Centrale de Bretagne

EDITIONS
REVUES
PÉRIODIQUES

PROGRAMMES
TOUS TRAVAUX
COMMERCIAUX

36, Rue Richard-Lenoir
RENNES

Korn ar Merour

Setu deuet ar miziou du, gouelioù kala-goanv. Kenavo evit eur pennad d'an devezioù brao. Digoret eo mare ar beilhadegoù en dro d'an tan. Er-mêz ar glas, an avel a c'hoari o fenn, a laka an dorioù diskloz da storlokat :

« Ol nak eo dudiüs

Chom er goudor, kaer, eurus

Em zi bihan ker karantezus. »

Brao eo, goude koan, konta marvailhoù an amzer gwechall, brao ober eun taol domino, *brao ive lenn Kroaz Breiz*. Dispakit an niverennou, resevet epad an hanv, ha n'ho peus ket bet a amzer da lenn. C'houi a gavo enno peadra da vaga ho spered, da ziroufenna ho tal.

Grit kaeroc'h. Adalek hirio, pep hini ac'hanoc'h a zello en-dro d'ezan evit gouzout piau a c'hellou gounit d'hor c'helaouenn. Bez ho peus eur mignon, eun amezok, unan pe unan eus ho kerent, a vije aes da c'hounit. Kroaz Breiz eo koanta, dudiüs kelaouenn brezonek a zo. Roit skoazell d'ezhi da veva, da gaeraat c'hoaz. An doare gwella eo digas d'ezhi lennerien nevez. Lakit evez ha dalc'hit sonj avat eo chenchet niverenn va c'hont-red. N'eo mui 21.802 mel 1266-53 Rennes.

**Micherourien, tiez a genwerz !
grit brud d'ho staliou e Kroaz-Breiz ;**



Inizi Breiz-Izel : Eun hent doun en enez Sun.

Ar merour : M. l'Abbé BLEUNVEN
Recteur, PLOMELIN, par Quimper

Ti-Mouleriez Kreiz Breiz
36, Rue Richard-Lenoir, RENNES



TRAON-DOUR-TENN

I

Em eñvor ez eus eun draonienn
Ha ne ankounain biskoaz,
Eun draonienn zioul, eun draonienn
c'hlas,
Marellat gant bleuñv ar spenn-gwenn.
Eur wazig sklaer a red laouen
Dindan geot druz ar pradeier :
'N em astenn a ra, 'vel eun naer.
Eus ar Wern betek 'is d'al lenn.

II

A-us d'ar waz 'mañ an dorgenn,
Hag he mengleuz vras dilezet.
Eno e peure va deñved,
'Touez al lann hag ar balan krenn.
Ar rozenn-gi, ar vouarenn,
A veske o brankou dreinek,
War diribin ar c'hrec'h meinek,
Dastrewet a vodou kelen.

III

C'hwitell ar mouilc'hi diren,
'Zave diouz hent koz an Ti-dour,
Ma tarnaje en avel flour,
Bleuñv-beo, balafennou (1) melen.
Gwez avalou war ar c'hlaezenn,
'Ziskenne eus ar Groaz-Nevez :
An draonienn 'oa 'vel eur verjez,
Leuniet gant frond (2) mevrus ar foenn.

IV

E-touez ar vein hag ar radenn
E kane skiltr ar grilhed du,
Epad ma heje ar brulu,
O c'hleier sioul a-us d'o fenn.
War an hent en tu all d'al lenn,
E kleven karr ar Goff o tont,
O sevel gorrek (3) ar c'hra sont,
Ebarz an heol hag ar boultrenn.

V

Ha me pignet war ar rizen,
E disheol roc'h ar vengleuz c'hlas,
O selaouen, dinec'het bras,
Va ene leun a sklerijenn.
Ha neuze d'ar serr-noz hepken,
'Teuen d'ar gêr gant va deñved,
Ma save goustad ar moged
'Us ti va zad e Traoñ-Dour-Tenn.



Yann KERLOAR

(1) Balafenn : papillon. — (2) Frond : c'houez-val. — (3) Gorrek : goustadik.